

4.

Ma n'euz sicour, red vo paea
Beteg an diner diveza,
Netra sotret n'ello sevel
Varzu hor Mestr teir guez'h santel.

5.

Eneou paour, var ar glaou rus
C'hui a c'houzanv sec'het spontuz,
Digant ho tud c'hui a c'houlén
Eur berad dour hag eur beden.

6.

Hag an dud-se o peuz karet
Ho mab, ho merc'h hag ho pried,
Ho lez duhount da hirvoudi,
Da drei en tân ha da zistrei.

7.

Mar deuz tud calet a galon,
O Guerc'hez Vari, hon itron,
C'hui da viana a bedo
Vit ma teuint er mæs ac'hano.

8.


Sant Morill, dreist oli, sant Gily
Na heanit ket da bedi
Vit ho pugale e creis ar flam
O c'houzaon poaniou estlam.

9.

Sant Mikael ha santes Anna,
Ken galloudus vit ar vuez ma,
Kassit hon tud d'ar barados,
Da veuli Doue, d'hor gortos.

DISKAN

Guerc'hez Vari, Mam truezus
Ouz an anaoun hirvoudus,
Guerc'hez Vari, n'ho lezit ket,
Pell en tân da veza devet.



ITRON-VARIA VIR SICOUR

TON : Eun Doue a zeu d'ho kervel.

1.

Salud deoc'h, Mari, rouanez
Euz an env hag an douar,
Salud deoc'h, Mam a drugarez,
A greis kalon ni lavar :

DISKAN :

Itron Varia-Vir-Sicour,
Clevit mouez ho pugale,
En hor poan hag en hor labour
Beillit varnomb nôs a dê.

2.

Choaset a bep eternite
Da veza Mam da Jesus,
Roet oc'h da Vam d'eomb ive,
C'hui hon rento evurus.

3.

Lec'hiou santel a zo merket
Da enori ar Verc'hez,
Enô e scuil varnomb bepret
Tenzoriou e madelez.

4.
Chapel ar Verc'hez zo brudet
En Elliant a tro var dro,
Hon tud koz o deuz e c'haret,
Ni e c'har ive d'hon tro.

5.
Dirag och imaj benniget,
Guerc'hez, ama ni bedo;
Pa vemp tentet pe glac'haret
Gant fiars ni a gano :

6.
Ar vam evit e bugelic,
Ouzoc'hu, mam hag itron;
A en em erbed birvidik,
Digorit dizi ho kalon.

7.
Ar soudard o vont d'an arme,
An dour en e zaoulagad,
A lavar : ô Mam a drue,
Va diouallit er stourmad.

8.
Dreist oll, ar priedou kristen,
Unanet dre'r garante,
A c'houlenn ne vanko biken
En ho zi doujans Doue.

9.
Evidomb-ni oll, Elliantet,
A lavar a vonez huel :
Ken eget mankout d'ho karet
Ni ve guell ganeomb mervel.

10.
D'an oll, en Elliant, Mam Doue
Ho c'hoant hirio goulennet,
Ma savetaimb hon ene
O kenderc'hel d'ho karet.



AN ANAOUN

Ton : Santez Azenor.

1.
O va Doue, ô va Doue !
Pegen trist eo stad an ene
A gouez e tân ar purgator,
A da vont kuit ne gav digor.

DISKAN

Guerc'hez Vari, Mam truezus,
Ouz an anaon hirvoudus,
Guerc'hez Vari n'ho lezit ket,
Pell en tân da veza devet.

2.
Hag gouscoude piau an hini
Ne iêl ket siouas ! da zevi,
Piau vo salvet eb mont d'an tân ?
Var gant ne vezo ket unan.

3.
En anaoun pell dious ho bro,
An esperans neo ket maro,
Pignat a raint d'ar barados,
Mes er poaniou red eo gortos.